

KIS-747 – An talbenn hag ar gevredigezh

(GE – 20 02 02)

Un dañjer hon eus da barraat outañ : dre haeriñ frankiz klok an den o krouiñ dirak nep beli ha nep aotrouniezh¹ eur temptet da zibriziañ ar gedvuhez ha frammoù ar gevredigezh. Dre greizañ ar werc'helezh war an nit hag an eskoriñ e ved techet da ziwelout gwerc'hegezh an niñv² hag ar c'hemmirout. Krouiñ eo galvedigezh mab den, n'eo ket avat krouiñ ur bed all e-kichen ar bed, n'eo ket hepken krouiñ e-barzh ar bed, met krouiñ ar bed ; an nit zo mammenn ar bed, sabr ar gevredigezh : kedvuhez, armerzh, politikerezh³. An argraf a-benn ar fin zo nebeutoc'h kevenebañ an nit hag an niñv, an oberour hag ar c'hevredig, an dispac'her hag ar c'heodedour eget deskriañ an tremen eus an andon d'an aber, eus an eskoriñ d'ar gevredigezh evel m'emañ en he rouestl ha war he femdez ; ar gevredigezh zo war un dro an “*hir a stêr habask*” hag an dispac'h peurzalc'hus.

Kement-se a zegasan war-benn sklaeraat ar pezh a sell ouzh diorreerion ar brezhoneg. Diorren ur yezh zo distremen dizehan he harzoù beziat. Alese e voe dodennet keal ha doareoù an talbenn : ennañ e unan ent kevredadel n'en deus an talbenn pouez ebet⁴ ; etre talbenn hag adreñv ez eus un esaou a annevid, un ankeñver⁵. Despizet eo an talbenn evel lec'h krouiñ, eleze lec'h ma ne biaouer galloud ebet ha war un dro ma n'en deus nep galloud gwir ebet. An adreñv zo ar gevredigezh en he fezh, a zo parzh enni ivez an dud a c'hoarvez dezho labourat war an talbenn — rak se emañ lec'hiet an ankeñver e-barzh pep hini eus an diorreerion, e tremen an esaou a annevid dre greiz buhez pep hini.

Aze e voe drama an Emsav. Hag eñ da gentañ luskad hiraezhus d'ur stad a draoù tremenet, en devoe ar chañs da vezañ lec'h eskoriñ ul labour diorren diles a roe dezhañ un egin a staelad istorek. An diorre-

¹ Sl. KIS-700, La-14, pp. 32 hh.

² A-zivout kevenebañ *nit* ha *niñv* er ster-se, sl. KIS-693, La-13, pp. 385-387.

³ Ar respont eo d'ar c'heneil a aterse : “Krouiñ ? Krouiñ ? Met krouiñ petra ?”

⁴ Sl. KIS-626, La-12, p. 382.

⁵ Sl. KIS-693, La-13, p. 396.

erion avat ne ouezjont ket reiñ e ster d'an ankeñver etre diorren ha kemmirout, etre talbenn hag adreñv. Kengret e fellas dezho chom gant o “breudeur” e-lec'h treiñ kein dezho. Diwar se ez eas an Emsav hebiou d'ar chañs a oa bet grataet dezhañ hag e tistroas d'e boent loc'hañ : dre m'o doa emnasket an diorreerion e troas tamm ha tamm en ur c'hlub kemmireerion a gemmeskas preveudi an diorren gant relegoù stuzegezh Breizh Izel — an dispac'herion a steuzias rak an hevelebourion. Pa na oa ket bet gwardet an ankeñver etre talbenn hag adreñv e tarzhas un troc'h diremed etre Emsav ha kevredigezh.

Evit adstagañ gant erv an diorren e ranked digeriñ un troc'h nevez, an hini a zoaread evel troc'h etre Emsav (en ur ster nevesaet) ha ledemsav (an “Emsav” er ster kent, pe Mouvement breton, teskad al luskadoù hevelebour). Hir amzer a voe ezhomm evit ergrafañ meizadoù an talbenn hag an ankeñver. E-pad pell e voe intentet an darempredoù talbenn-adreñv diouzh patrom an darempredoù a oa bet etre Emsav ha ledemsav. Hir amzer zo bet ret dimp evit erlec'hiañ darempredoù eeun, nebant, etre keodediz ouzh hon darempredoù forc'hellek gant tud ar Mouvement breton, kuit eus ar spered a familh o ren etrezo, kuit ivez eus hon dispell diouto¹, hag erfin evit arc'hañ al lec'h a zalc'homp war dalbenn diorreerezh ar brezhoneg. Al lec'h hemañ ma labouromp ha ma roomp da anaout frouezh hon labour — d'hon c'hemprediz da zont dezho mar kavont mat ha d'ober ganto ar pezh a garont.

Hevelep angalloud da “riklañ a-ziwar dachenn an nit war dachenn an niñv²” ne vir ket a glask sklaeriañ kudenn tonkad frouezh an talbenn. Ankeñver ne dalvez ket andarempred. Pa grou ar barzh, ne grou ket evit ur skol pe ur c'hlub, ne grou ket evit ur vro na zoken evit an denelezh. Krouiñ ur gourzhdrec'h digent zo krouiñ war un dro ur gouzrec'h digent. Ar barzh, o krouiñ ar barzhoneg, a grou den ar barzhoneg, ennañ e unan da gentañ, er bed da c'houde. Un dra anavezet eo ne labour ket an arzour evit ur c'hevredig rakgraet : an oberenn diles a lak he c'hevredig da ziwanañ. Soñjomp e *Gwalarn* a reas diflukañ un noueañs nevez a vrezhonegerion hag a zo deuet e yezh hiziv da ziazez ar brezhonegoù klevet ha lennet. Ar taolioù diorren renet war dalbenn ar yezh abaoe pemont vloaz a grog ivez da gaout heklevioù er gevredigezh.

¹ Agentao e pellgomze ouzhin ur geneilez eus an “Emsav” : “Met perak en em zalc'hit er-maez ?” Ne voe ket evit respont da 'm gourzhaters : “Er-maez eus petra ?” An dud war ar straed, estren d'al luskadoù breizhek, mar c'hoarvez dezho hon c'hemer da gentañ evit izili eus ar Mouvement breton, a verzh buan ez omp ken estren dezhañ hag int o unan. Evel just, kement-se n'o skoazell ket mar fell dezho lakaat ur skritell warnomp. Hogen un istor all eo...

² Evit kevelc'heriañ frazenn Roparz HEMON, sl. KIS-700, La-14, p. 34.

Oberoù an talbenn a gav dirazo daou zegemer : pe a-rekin, gant spered lec'helour al luskadoù breizhek argarzhus d'an eskoriñ evel d'ur walenn a lak o hevelepted en argoll¹ — en degouezhioù ma ne vezont ket evit serriñ o dor ouzh ur grouadenn, e kemeront o diarbennoù hag, e welet hon eus, e torrout sav d'he sabr dre zistresañ he neuz hag he ster² ; pe laouen, gant spered hollveziadek an talbennoù ma egin ar sevenadurioù — kevarc'het e vezont breurek gant ar grouerion all forzh pe hini e ve o lec'h er bed.

Bloavezhioù zo bet lakaet evit kompren e rank talbenn diorren ar brezhoneg dianaout da vat al luskadoù hevelebour hag emzerc'hel a-dal d'ar gevredigezh werc'hel, ha hi gallek evit an ampoent. Ne veulan ket perzhded al labour kaset gant *Ofis ar brezhoneg*. Koulskoude, daoust ma voe amparet an aozadur-se war atiz un dilenned damantus d'e remzad ha gant ur c'hoskor evodet eus ar Mouvement breton, e rankan stadañ e teu da vezañ ur framm organek eus ar gevredigezh werc'hel ; emañ o kas da vat, ent furmel, an “eztreiñ” a amkanemp en ESB, o korntroiañ en devoud skoilh ar c'hlub serret warnañ e unan — dezhañ bremañ da zistardañ kraban ar bolitikerion strolladel, da zibourc'hañ pezh a chom warnañ a druילוù ideologek ha... da enderc'hel e izili da c'hounit ur stummadur a-geñver gant e gefridi.

Kemeromp degouezh an nevezc'her. Ganet e vez peurliesañ war daol labour ur yezhour e disoc'h eskemmoù gant yezhourion all. E donkad zo hini nep oberenn arz. An daolenn, ar barzhoneg a denn pe get evezh o danvez kevredig ; ar gerioù a diñv pe get. Danvez preder zo eno : perak, penaos e ra berzh un oberenn arz, e tiñv ur ger ? Mar gwriziennont da vat e dierouez o c'hevredig, e voulc'hont ur remzad dizalc'h diouzh daouarn o ganer ha ne baouezont nepred a zioueliañ o digented. MERLEAU-PONTY a lavare “emañ buhez ar c'hrouadennoù hogos en he fezh dirazo³”.

“Tiñvañ”, “gwriziennañ” : diwar-bouez leterc'hadoù e verker tonkad ar c'hrouadennoù, ar verboù-se ne gemeront ket da rener an oberour gwirion a zo ar c'hevredig. Setu perak, en o c'hichen e karfen degas ur verb all dienderc'hadek o kaout an oberour da rener. Ur verb a zeu d'ar spered eo Br. *atoriñ*. An aozer a eztaol e

¹ Sl. KIS-718, La-14, pp. 165 hh., ha pp. 168-169 pergen.

² Sl. p. 76 a-zioc'h ha n. 1 & 2.

³ “Si les créations ne sont pas un acquis, ce n'est pas seulement que, comme toutes choses, elles passent, c'est aussi qu'elles ont presque toute leur vie devant elles” (*L'Œil et l'Esprit*, Gallimard, 1964, pp. 92-93).

oberenn evel ur *me* nevez¹. Ar c'hevredig avat ne ra forzh eus hevelepted an aozer : mar degemer, mar piaou an oberenn eo pa gav ganti un danvez *me* hebanv — bezañ diles evit un oberenn eo bezañ dispiaouadus (anatoc'h c'hoazh kement-se evit a sell ar ger : ne vezer ket chalet da c'houzout piv a reas ar gerioù a arverer). En un doare enta e vez an arvester oc'h *atoriñ* an daolenn, o kemer en e ambred an oberenn bet savet en ambred al livour. Heñvel dra evit lenner ar barzhoneg, arveriad ar ger. Gant *atoriñ* avat e chom andec'her ur c'heal : he “buhez” er ster intentet gant MERLEAU-PONTY he deus an oberenn, ha perzhiat e vez enni an den, na pa ve aozer pe gevredig, ha perzhiat diwar vont : perzhiaded all a zeuy, a gavo ivez o buhez en oberenn diwar doareoù all anezhi manet dianav d'an aozer ha d'ar c'hevredigoù kentañ. Un tremeniad eo an den e-keñver an oberenn. A se da verkañ an darempred a-gostez, danel bepred, en devez ganti e tere a-walc'h ar rakger *led-*. Kinnig a ran Br. *letoriñ* da aroueziñ an ober a zo e gwrizienn an arvestiñ oberennoù, al lenn barzhonegoù, an arverañ gerioù.

Br. *-(h)or-*, a gaver e Br. *ator*, *atoriñ*, Kb. *ator*, zo en e orin Kt. **ser-*, **sor-* "couler, se précipiter" (DGVB 277), **ser-* "lifo, rhuthro, rhedeg" (GPC 232). Pa gej froud buhez² an den gant froud “buhez” an oberenn, e c'hoarvez ar gejadenn diouzh un tu hepken³ : he *letoriñ* ne ra ken.

Merkomp un arver all eus ar rakger *led-* en un dachenn nes da hemañ gant Br. *ledemsav*, termen krouet e 1967 da verkañ al luskadoù breizhek despizet evel “unvezioù hiron, o tennañ war un dro d'an Emsav ha d'ar galloud gall⁴”. O treuzlakaat ar c'heal, kentoc'h o reiñ dezhañ e astenn klok, e c'haller ober “emsav” eus pred an nit ha “ledemsav” eus buhez an oberenn er gevredigezh. Stadomp, mard eo mab den galvet da vezañ krouer, ned eo krouer, “emsaver”, nemet e-doug predoù rouez ha berr hag ar peurliesañ ez eus anezhañ ul “ledemsaver”, ul *letorer*.

(YBAN da GE – 25 02 02)

Evel a verkez, n'eus ket a zisrann etre un diabarzh hag un diavaez, etre un Emsav hag ul ledemsav, etre un talbenn hag ur gevredigezh... (*Aon pe ober traoù !*) Ent hiniennel ned eo ket an den ur c'hrouer no/pe ul letorer ha ne c'haller ket e

¹ A-zivout “armerzh” ar *me* hag an *nit*, sl. KIS-745, La-15, pp. 76-77.

² Keal hemañ dec'heriet kaer gant HUSSERL dre Al. *Erlebnisstrom*.

³ Evit adkemer bomm HERDER : “An den zo ur skiantenneg trebadus tizhet gwech en un tu gwech en tu all” (sl. KIS-345, La-08, p. 337 & KIS-502, La-10, p. 414).

⁴ Sl. “Al ledemsavioù”, *Emsav* niv. 5, Mae 1967, pp. 113-116.

silzigennañ. Ha ne ve ket un diarsell all da gavout ? Lunegor pevar stael an dispac'h zo aet ezwaz, ha ned eo ket mui ken sklerijennus ar c'hevenebadur Emsav/ledemsav. Se eo a reomp o nac'h emellout ivez ? Mall eo azgwelout pep tra.

(GE da LM – 27 02 02)

YBAN ne gav ket echu va skrid — ar gwir gantañ ! Dave a ra d'ar pennad “Pevar stael an dispac'h¹”. Ar pennad-mañ diwezhañ oa damkanadur dikañ ESB. Poent eo ober an dezrann anezhañ, na pa ve dre benn ma chom oberiant ganimp, hep rat dimp, emzalc'hioù aet disol. Dre PSAD, ESB a gantreizhe talvoudegezh daou dra a chom talvoudek : al labour a renemp da grouiñ ur yezh, an emzezh peurzalc'hus. An diac'hinad eo e savele ESB e gantreizhadurioù diwar-bouez daou dra a voe distaolet da c'houde (er bloavezhioù seikont dre berzh an dialusk displeget gant PSAD end-eeun) : an dialektik leninour, ar stourm broadel (hennezh arloet ouzh hemañ). An diazez, andezrannet e 1970, eus hon obererezh oa, diouzh un tu, ar gredenn ne c'halle ur brezel dispac'hel nemet difourkañ en ur stad a draoù o vastañ d'hon iziunadoù (heklev d'ar vesiazelezh varksour), diouzh an tu all, ar gredenn ez eus gant ar vrezhonelezh un dreisted o kantreizhañ ur brezel dieubiñ (treuzpaderezh kealiad stourmoù broadel an 19^t kantved *via* an eil Emsav). Unan eus dilerc'hioù an amzer-hont chomet ganimp andezrannet hiziv eo an ergraf a ledemsav. Al ledemsavioù a zespizemp evel furmadurioù diwanet e-barzh ar framm enebour dre heklev ouzh an Emsav hag oc'h amparañ ur benveg gourzhtreiñ tonket da vont da get war un dro gant ar framm enebour. Ur wech diskuliet gaou an dialektik leninour ha dispred ar stourm broadel e paoueze damkanadur al ledemsav a vezañ kantrat. Padal e-doug bloavezhioù ez eus chomet ur foz don, un enebiezh, etre an ezizili eus ESB a gendalc'he gant al labour yezhel ha dezrannel hag al luskadoù breizhek. E diouer un dezrannerezh nevez, e voe dalc'het da arloañ ouzh ar re-mañ damkanadur kozh al ledemsav. Alese monedoù amjestr, forc'hellek, ouzh al labourerion vrezhonek all ha, peurliesañ, an nac'h o daremprediñ. Koulskoude, daou rumm darempredoù o deus hon rediet da zistreiñ war hevelep emzalc'hioù sonnet. Da gentañ, hon darempredoù gant *An Here* ; eno e kavemp tud frammet o ren ul labour diastal ha mennet da zisoc'hañ gant ur yezh wirion ; diaezet oamp gant o c'healiadur dizunvan o virout outo a vont pelloc'h eget an hanterhent etre ur stuzegezh aet da get hag ar bed gwerc'hel ; dre hon c'henlabour ganto war grefen poentek ez omp aet en tu all da zamkanadur al ledemsav : nepred n'o sellemp evel binvioù tonket da c'hourzhtreiñ ar galloud o ren (sellad na c'hellomp ket

¹ “Pevar stael an dispac'h” (teskanvet PSAD amañ), *Emsav* niv. 40, Ebrel 1970, pp. 113 hh.

da skouer na deurel ouzh *Diwan*), met bepred evel tud o strivañ, ent ergorel da nebeutañ, etrezek an un dremmwel ha ni. D'an eil, hon darempredoù gant *Ofis ar brezhoneg* ; an doare m'o gwelan a zisklerian [p. 80 a-zioc'h] ; daoust da gement a c'haller soñjal eus o c'healiadur hiron hag eus an ezvezañs ganto a zamkanerezh hag a stummadur siwazh, ned eomp ket outo evel ouzh ul ledemsav (hervez despizadur kozh ar ger). Alese ar ret dimp karzhañ da vat an dilerc'h-se a zamkaniezh ha damkanañ an embregiezh a gavomp kantrat er saviad a vremañ. Ur c'hendaolad d'an damkanadur-se a 'm eus graet ; hag a-du on gant YBAN evit gwelout eno un derou hep mui.

(RLN da GE – 28 02 02)

Gant gwir abeg e lavarez eo deuet *Ofis ar brezhoneg* da vezañ bremañ un elfenn eus ar vloc'henn, ha neket mui un aozadur arlezat. Met dres, penaos ha pelec'h e c'hallio izili an *Ofis* kaout ar stummadur ret da gefleuniañ o c'hefridi en un doare bastus ?